

(406, suite)

Da Breizis-Veur. = 1<sup>a</sup> mae 1842.

(407)

Deiz mad, a greiz calon, habitantet Breiz-Veur,  
 C'houi pere a garomp da hevel hor breudeur!  
 En hor gouziedou ar memes goad a red,  
 Hac ive 'r memes yes a gozeomp bepred.  
 Rac-se-ta, etrezomp ravezimp unvanet,  
 P'eo er memes sourcen e zomp-ni <sup>bet</sup> ganet.  
 Caromp da virvigen hor langach ger a Vreiz:  
 Eul levenez tener a zantomp en hor c'kreiz  
 P'hon ens ar blijadur d'ellout brezonneca.  
 Ja, ar yes ger-ze en hon touez a laca  
 Eur garantez guirion etrezomp-ni, Breizis,  
 Hac a bado bepret, d'août d'an droucranq erpis  
 Demens ar re a glasq distruji hor langach;  
 Mes carantez hor brô a rai hon avantach.

(408)

Bennos Doue ra vo ma zoun ganet e Breiz!  
 Ar bonneur-se a ra tridal va goad en c'kreiz.  
 Ah! peroc, va Doue! n'oun-me get yaouanco'h!  
 Gant pequeument a hast e gerjen etrezoc'h!  
 Eno, eurus meurbet, em bize bet elévet  
 Cozeal brezonec en joa vras va speret.  
 Mes pa n'ellân tizout d'ar c'hoant-se a zantân,  
 Deus a fonq va c'halon hirio e regetân  
 Ma verzo unvanet peb amzer ha peb leser  
 Breiziz an Arvoric ha Breiziz a Vreiz-Veur.

A. Lédan.

Roet copi d'an A. Jenkins, an 2 mae 1842, da gass d'e vîo.

(Vol. IV, p. 406-408.)